

Gorreoù : Degas 'reomp da soñj ag ho marv,
Aotrou Krist savet da vev,
Ha gortoz a reomp ho tistro.

Hon Tad : hag a zo en neañv, hoc'h anv ra vo santelaet, Ho rouantelezh degaset deomp, Ho vennantez ra vo graet àr an douar 'vel an neañv.
Roit deomp hiriv hor bara pemdeziek, Pardonit deomp hor pec'hedoù, 'vel ma pardonomp d'ar re o deus pec'hed doc'homp, Ha n'hon laosket ket da gouezh en tantasion, Met hon diwallit doc'h an droug.

Ar beleg : Plijet geneoc'h, Aotrou Doue,... ha distro hor Salver Jezuz-Krist :

R/ : Rak deoc'h-C'hwi, Aotrou Doue, emañ ar Rouantelezh, ar gelloud hag ar gloar a-holl-viskoazh da virviken. Amen.

Oan Doue :

**Oan Doue a lam pec'hedoù ar bed : ho pet truez doc'homp ! (bis)
Roit deomp ar peoc'h !**

Kent ar gomunion :

*Ar beleg : Setu Oan Doue, setu an Hini a lam pec'hed ar bed :
Eürus ar re a zo galvet da bred santel an Oan.*

**R/ : Man Doue, ned on ket dign ma tait davedon,
met lârit ur ger hepken hag e vo aesaet din.**

Komunion : Kalon sakret Jezuz, Kalon sakret ma Doue

Entanit ma c'halon get tan ho karante.

- 1 Jezuz, a holl viskoazh, ennon hoc'h eus soñjet,
Jezuz, a holl viskoazh, C'hwi ho peus ma c'haret.
- 2 Petra ho touge-C'hwi da reiñ din ar vuhez,
Petra ho touge-C'hwi nemet ho karantez ?
- 3 Perak a lein en neañv eh oc'h-C'hwi diskennet
Er c'hraoù a Vethleem ? Rak m'hoc'h eus ma c'haret.
- 4 Jezuz, àr ar c'halvar, pe liamm ho talc'he
Ariet doc'h ar groaz ? Atav ho karante !

Kan-dibenn :

Rouanez an neañv, kemerit joe,
Allelouia ! Allelouia !
Rak ar frouezh ag ho tigostez
Allelouia ! Allelouia !

A zo savet bev ag ar bez,
Allelouia ! Allelouia !
Pedit 'eidomp an Aotrou Doue,
Allelouia ! Allelouia !

Deoc'h, Gwerc'hez, joe ha levenez,
Allelouia ! Allelouia !
Jezuz 'zo savet ag ar bez,
Allelouia ! Allelouia !



Overenn da zonet e KêrAnna : d'ar 6 a viz Gourhelen da 10e30.

Parrez KerAnna

7vet Sul Fask

Pask kentañ Aziliz

1^{añ} a viz Mezheven 2025 pe miz ar Galon Sakr

Kan digor : 1 Hon Tad a zo en neañv, roit deomp ho Rouantelezh,
'Veit ho prasañ enor hag hor salvedigezh.

**Hon Tad a zo en neañv, ho anv ra vo meulet,
Get an Aeled, ar Sent, an dud, an traoù kroueet !**

2 Hon Tad a zo en neañv, bet graet ho volante
Get kement hani zo, àr an douar 'vel en ne.

3 Hon Tad a zo en neañv, roit deomp bara bemdez,
Roit deomp hiniv bara ar c'horf hag an ene.

4 Hon Tad a zo en neañv, deomp-ni-holl pardonet,
'Vel ma reomp-ni d'ar re en deus hon ofañset.

Salud d'ar bobl :

*Ar beleg : Gras hor Salver Jezuz-Krist, karantez Doue an Tad
hag unaniezh ar Spered Santel, ra vint geneoc'h-holl :*

Respont : Ha get ho spered !

Asperges : Allelouia !

- | | |
|--|---|
| 1 Ha gwelet am eus an dour bev
É strinkiñ a galon ar C'hrist !
An holl re 'vo gwalc'het en dour-se
A vo salvet hag a gano : | 3 Gwelet am eus ivez an Templ
Digor da virviken d'an holl
Ar C'hrist a zeu en-dro get trec'h,
A ziskouez gouli e gostez. |
| 2 Ha gwelet am eus ar vammenn
É tont a vout ur stêr divent !
Ha bugale Doue, holl tolpet
'Gane laouen a vout salvet : | 4 Gwelet am eus ivez ar Gomz
É reiñ deomp peoc'h hon Aotrou Doue.
An holl re a gred en e anv
A vo salvet, hag e kanint : |

Gloria : Gloria in excelsis Deo ! (2 wezh) In excelsis Deo !

Peoc'h àr an douar d'an dud karet getoñ ; Ho meuliñ a reomp. Ho trugarekaat a reomp. Hoc'h ador^{iñ} a reomp. Enor deoc'h a ganomp ha mil bennozh aveit ho kloar hep par. Aotrou Doue, Roue an neañv, Doue an Tad hollgellougek.
Aotrou, Mab unganet, Salver Jezuz. Aotrou ha Doue, Mab an Tad. C'hwi hag a lam pec'hedoù ar bed, ho pet truez doc'homp. C'hwi hag a lam pec'hedoù ar bed, degemerit hor pedenn. C'hwi hag a zo azezet en tu dehoù d'an Tad, ho pet truez doc'homp.

Rak C'hwi hepken a zo santel. C'hwi hepken a zo Mestr. C'hwi hepken a zo uhel-meurbet, Salver Jezuz, Get ar Spered Santel, e gloar Doue an Tad. Amen !

Lennadenn getañ : Lennadenn tennet a levr oberoù an Apostoled.

En deizioù-se, setu Stevan dirak ar Yuzevion a glask er c'hondaoniñ. Met eñ, leun get ar Spered Santel, paret e sell àr an Neañv, a welas neuze gloar Doue ha Jezuz en e sav a-zehou da Zoue. «Setu, eme-eñ, ma welan an neañv digor, ha Mab an den en e sav a-zehou da Zoue.» Neuze e kriaont holl a-bouez-penn en ur stankiñ ho divskouarn, hag holl en em daolazont àrnañ. Hag, ur wezh ma oa bet taolet dezhe en diavaez kêr, int en em lakaas d'er meineta. An testoù a lakaas o dilhad doc'h treid ur paotr yaouank anvet Saoul. Ha meinata a raent Stevan e-pad ma rae-eñ ar bedenn-mañ : «Aotrou Jezuz, degemerit ma spered.» Neuze e plegas e zaoulin hag e youc'has en ur griadenn vras : «Aotrou, ne lakait ket ar pec'hed-se àr o c'hont.» Hag é lâret kement-se e kouskas er marv.

Setu komz an Aotrou Doue : Bennozh da Zoue !

Psalm 96 : *Aotrou, C'hwi eo hor Roue, an Uhel-meurbet àr an douar a-bezh !*

An Aotrou a ren ! Ra drido an douar,

Ra vo levenez get bed an inizi.

Justis ha gwir a zo diazez e dron.

Embann e ra en Neañv e justis,

Hag an holl bobloù a wel e c'hloar.

Stouit dirazañ, c'hwi an holl doueed.

Te, Aotrou, eo an Uhel-meurbet

Àr an douar a-bezh,

Kalz uheloc'h eget an holl doueed.

Ëil lennadenn : Lennadenn tennet a levr an Diskuliadur

Me, Yann, am eus klevet ur vouezh é lâret din : «Setu ma teuan edan berr amzer, ha ma gopr a zegasan genin evit rantiñ da bep unan hervez e labour. Me eo an Alfa hag an Omega, an hini kentañ hag an hini diwezhañ, ar penn kentañ hag ar penn diwezhañ. Eurur ar re a walc'h o sae evit bout gwir àr gwezen ar vuhez hag ha monet tre e Kêr dre an dorioù. Me, Jezuz, am eus kaset ma Ael da reiñ deoc'h an testoni-se diàr-benn an Ilizioù. Me 'zo gwrienn ha lignez David, ar steredenn vintin lugernus.» Hag ar Spered hag ar Plac'h nevez a lâr : «Deus !» Hag an hini a glev, ra lâro : «Deus !» ; an hini en deus sec'hed, ra zay ; an hini en deus c'hoant, ra resevo ag an Dour a Vuhez evit netra. Hag an hini a destoni kement-mañ a lâr : «Ya, donet a ran a-benn.» Amen. Deus, Aotrou Jezuz !

Setu komz an Aotrou Doue : Bennozh da Zoue !

Aviel : Allelouia

Ar beleg : An Aotrou Doue geneoc'h : R/ : Ha get ho spered.

Ar beleg : Lennadenn ag an Aviel santel hervez St Yehann.

R/ : Gloar deoc'h-Chwi, ô Aotrou Krist !

En amzer-se, Jezuz, troet e zaoulagad àr-du an neñv, a bede en ul lâret : «Tad santel, n'eo ket evite hepken e pedan, met ivez evit ar re a gredo ennon diàr o c'homz, evit ma vint holl unan, evel ma ous-Te, ma Zad, ennon ha me ennah ; evit ma vint int ivez unan ennomp, ha ma kreda ar bed eo Te ac'h eus ma c'haset. Ar gloar ac'h eus roet din, am eus roet dezhe, evit ma vint unan 'vel mah omp-ni unan.

Me enne ha Te ennon, evit ma teuint da vout peurunvan, ha mah anavo ar bed ac'h eus ma c'haset, hag o c'haret 'vel ma c'h eus ma c'haret. Tad, ar re ac'h eus roet din, e faot din ma vint genin, int ivez, el lec'h ma vin-me, evit ma welint ma gloar, an hini ac'h eus roet din ; rak ma c'haret ac'h eus kent krouidigezh ar bed. Tad just, ar bed n'en deus ket da anavet ; me avat am eus da anavet, hag ar re-mañ o deus anavet eo Te en deus ma c'haset. Hag o lakaet em eus da anavet da anv hag e rin c'hoazh, ma vo enne ar garantez ac'h eus evidon ha ma vin-me enne, me ivez.

Setu Komz an Aotrou : R/ : Meuleudi deoc'h, ô Aotrou Krist !

Kredo : Me 'gred e Doue, an Tad hollgelloudek, Kroueour an neañv hag an douar, hag e Jezuz-Krist, e Vab unganet, hon Aotrou, a zo bet koñsevet dre nerzh ar Spered Santel, ganet ag ar Werc'hez Vari, en deus gouzañvet dindan Poñs Pilat, a zo bet staget doc'h ar groaz, marvet ha bet lakaet er bez, diskennet d'an ifernioù, daet a varv da vev an drivet deiz, pignet d'an neañv, hag azezet en tu dehoù an Tad, a-eno e tay da varn ar re vev hag ar re varv.

Me 'gred er Spered Santel, en Iliz santel katolik, e kumunded ar Sent, e pardon ar pec'hedoù, e adsav ar re varv, er vuhez peurbadus. Amen !

Pedenn hollbedel :

Aotrou, hon Doue, ô Tad Santel, selaouit hor pedenn !

Kinnig : Dispozit ma c'halon 'vit ho resev, man Doue !

1 Dispozit ma c'halon 'vit ho resev, man Doue ;

Roit din feiz, esperañs, kreñvait ma c'harantez !

2 Jezuz, Roue an Aeled, a zo àr an aoter :

Me 'glev doc'h man galviñ e vouezh leun a zouster :

3 « Dait, a lâr hor Salver, dait buan, ô ma c'hrouadur :

Get bugale an dud emañ ma flijadur. »

4 « Dait, a lâr c'hoazh Jezuz, ha Me 'roay sekour doc'h ;

Ho samm àr ho tivskoaz a zay da vout skañvoc'h. »

5 Mont a rin davedoc'h, o Jezuz, hep dale,

Pand eo gwir em galvet get kement a druez.

Lid ar profoù : *ar beleg : Pedit, mam breuder, ma plijo get Doue an Tad hollgelloudek degemer ma sakrifis a zo ivez ho hani-c'hwi :*

R/ : Plijet get Doue en degemer ag ho taouarn, aveit e c'hloar hag e veuleudi, aveit hor mad-ni hag hani an Iliz.

Prefas :

Ar beleg : An Aotrou Doue geneoc'h :

R/ : Ha get ho spered !

Ar beleg : Hor c'halon d'an uhel :

R/ : Emañ troet trema Doue !

Ar beleg : Trugarekaomp hon Aotrou Doue :

R/ : Just ha santel eo !

Santel : **Santel ! Santel ! Santel ! An Aotrou Doue, Mestr an Ne hag an douar !**

Lan eo get ho kloar an ne hag an douar : **Hosanna e lein an Ne !**

Ra vo benniget an hani a za e anv Doue : **Hosanna e lein an Ne !**